

ZON

447

Var sujet dar Vretonet ar Brezel Parzek, Pemzek a Houezek

Ton : A Toër Meign Glaz



1^{er} Couplet

Domini probasti me necum me secunda
Na me o ped ma doue da zont da sklerigina
Ma gompozin our recit var huc ar Vretonet
Partout a deuz kombattet deuz ar Brussiannet.

2

Da guentan evit komanç a deket corps d'armée
Pa he partiet in kampagn a zizquenaz in Vouziers
A goude trezek Belgik a deuz kerzet var droad
Ak ebarz in ker a Fosse a grogaz a attak.

3

A hanet da Charleroi ma hint bet partiet
Ar Brussiannet var ou lérh ken vonuz a kerzet
Na hoant ket hoaz aru mad galet n'em renforci
Pa grogaz ar fuzullou ar hanoniou tonnit.

4

Enant zo bet our gombat dimeuz ar re hoazan
Chomet zo var ar blenen ia kalz deuz on nezan
Ia dimeuz ar Vretonet kalz enant zo chomet
Nimet ar Brussiannet oa ive mitraillet.

5

Neuzen a man Tourteron ak ar gombat sanglant
Mump kolet rezervited evar dro pevar hant
A dra ze zo bet evidomp ia ive our goel gol
A ret dimp hoaz cedi a dachen gant a tigret dirol.

6

Ebarz in victoir ar Marn a man Meaux a Pontoise
A neguet corps d'armée in La Fère Champenoise
A renez dre o houraj a dre zon ar hlairon
Chetaz zoudardet Guillou barz in marais St-Gond.

7

Ebarz in combat l'Yzer on territorialet
A empechaz hint Calais deuz ar Brussiannet
Ak a oa o zikour ar fuzillet Marinet
Gant an amiral breton ma hint bet kommandet.

8

Evite da vezan koz a renez a oa hardi
Ak a re da Brussiannet ober a roket rekuli
Goude man attaque Arras a naouet de a Vai
A neuz kolet Breiz-Izel kalz deuz i bugalet

9

Ben our pennadik goude deuz bet our miz repoz
A pa oa fin dou anizer a oa daou de retorno
Neuzen trezek a Argonne ma hint ped kazet
Evit gouelet ar homprinz ag in vendem friponet.

10

Ak ar rest dimeuz ar goand enan hint bet choinet
Ken a grogaz ker Verdun da vezan bombardet
Miz houere ar bla houezek pa grogaz a attaque
A hoant aru adare eben a goazan strak.

11

Enant ma fort Douomont zo houeh gouech kemeret
A chomet ben a oa fin dre daouarn ar Vreized
Dimeuz zoudardet Guillou kalz enant zo lahet
Mimp na mamp ket kolet kalz a dud mez tom a
[mamp tapet.

12

Ar Vretoned zo evel lionet var dachen ar brezel
Ia kentoh evit cedi a gonzantant mervel
Ar breizad zo ou den a fe ak a religion
A devez ket kalz a aouën nag a ve ret raman kant.

13

Gouelte a ve hanou kalz a ne barz in citation
Evit recompenc deuz a dra ze ou décoration
A pozet ave a insign evar ou estomak
Evit dizkouel heint bet kourajuz a na deuzket
[spontet.

14

A neur zont da finiza enor da Vretonet
Bizkoaz neuz bet capaploch zoudardet var a bed
Ebarz tout attaquou ma heint bet expozet
Neuz forç var pezorte ennemi a deuz bet triomphet.

In pevar horn ar park brezel a deuz bet kombatet
Ebarz tout ar bataillon a deveuz bet vainkret
Var ar miniou ar hoajou ive var ar blenen
Na dimeuz ar mor du Nord tre da Alsace-Lorraine.

Mar vije bet ar broiou all evel on bro Breiz-Izel
Ouzpen ar bla zo mar ma hredet vije fin ar brezel
Mar vije bet ar bet ar broiou all ia evelti peuplet
A matap bet daou vilion ouспен a zoudardet.

Evit ar goand tremenet ar zon man zo zavet
Nour villajen deuz Breiz-Izel i hano Kerdaguet
Na neuzen a adresse evit galout i havet
A man in parouz ak in kanton Kalek.

*Souvenir de la part
de France de
Christ*

Na gand our hanfart yoank ar zon man zon rimet
He i hano Jean a Tertre klaz trioeh naontek kanvet
Neuzen i profession pe guelloch i vicher
A zo turheler douar in galek cultivateur.

Evitan na neket zavant a neuz gret ar rims
Evit couraji rei enor na da dud i vro
E neur zon da finiza a houl bezan iskuzet
Na ganah tout dud yoank emar neuz drouk
[komzet.

*Toute propriété réservée à Pierre JOUAN
de Carnoët*

*de France de
Christ*

